

KANTIK SANT HAGLOAR (e MAHALON)

Diskan, O Sant hagloar, or Patron ker,  
 Or sikourit e peb amzer:  
 Roit deom hirio, en han' Doue,  
 Yehed ar horv hag an ene ;

1.- Ginidik a lignez uhel,  
 A gerent kristen ha santel,  
 C'houi 'peus kuitet bro ha madou  
 'Vit prezeg ar feiz d'on tadou.

2.- On tadou koz, tud a galon,  
 'Deus ho choazet 'vit o Patron,  
 Hag o deus bet oll, a viskoaz,  
 Laket ennoh eur fizians vras.

3.- Er bed-man, allas! reuzeudik  
 Ez om oll, paour ha pinvidik,  
 Gant an anken hag ar hlenved,  
 Siouaz! bep mare om krignet.

4.- Ar horf en deus e glenvejou  
 Hag an ene he houliou:  
 C'houi a gav, dre zikour Doue,  
 Remed d'an eil ha d'egile.

5.- Daoulinet dirag ho skeuden,  
 A greiz kalon ni a houlen,  
 Araok en em zispartia,  
 Ma teufec'h c'hoaz d'or benniga.

6.- Lakit don en or halonou  
 Karantez Jezuz, on Aotrou,  
 Ma hellim gwell e zervicha  
 Keit a ma vezim er bed-man.

7.- Eürus breman ha leun a hloar,  
 Taolit eur zell war an douar:  
 Hirio dreist-oll, war ho parrez,  
 Skuilhit ho prasa trugarez.

8.- Ha pa deui an eur diweza,  
 An eur da guitad ar bed-man,  
 Bezit neuse dirag Doue  
 Eun alskad 'vit on ene .

9.- Pedit evidom deiz ha noz,  
 Evit ma' z aim d'ar baradoz,  
 Ganeoh ha gant an oll Elez,  
 Da veuli Doue da jamez .

